

146382

K A I E R O U

K E N V R E U R I E Z A R B R E Z O N E G

E S K O P T I K E M P E R H A L E O N

+++++



K A I E R N° 5

Ebrel 1970

Cahiers non périodiques. Souscription pour 500 pages : 10 F.

C.C.P. 193.17 Nantes, Chanoine Nédélec (Ker-Anna, 29 S Quimper)

SKRITUR ZAKR EN OVERENN - Bloavez B -

Eil sulvez Pask - Skritur Zakr	1-3
..... Orezonou an Overenn	4
Trede sulvez Pask: Skritur Zakr	5-7
..... Orezonou	8
Pevare sulvez Pask - Skritur Zakr	9-11
..... Orezonou	12
Pemped sulvez Pask - Skritur Zakr	13-15
..... Orezonou	16
C'hwehved sulvez Pask - Skritur Zakr	17-19
..... Orezonou	20
Gouel ar Yaou-Bask - Skritur Zakr	21-24
..... Orezonou	25
..... <u>Prefas</u>	26

Troidigeziou aotreet da arnod, evid an eskopti,
a-berz an Aotrou F. Barbu, Eskob Kemper ha Leon.

Kemper, d'ar 7 a viz Ebrel 1970.

+ V. Fave, eskob-skoazeller.

EIL SULVEZ PASK (pe Sul "ar C'hazimodo")

Lennadenn Ia.- Buez ar gristenien genta: feiz ha karantez.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (4/32-35)

32. An dud a oa deut d'ar feiz, niveruz kenañ,
n'o doa nemed eur galon hag eun ene;
dén ebed en o zouez ne lavare beza perhenn d'ar pezh a oa en e gerz,
med an oll draou a oa boutin etrezo.
33. Gand nerz birvidig, an Ebestel a zouge testeni
e oa Jezuz, an Aotrou, adsavet da veo;
ha braz e oa gras Doue war an oll ziskibien.
34. En o zouez ne oa nikun en dienez. Rag ar re o doa tachennou pe diéz
a werze anezo hag a zigase ar priz e-harz treid an Ebestel;
35. hag e veze ingalet ar peadra etre an oll, da bep hini diouz e ezommou.

=====

SALM 117 / 2,4; 16ab,18; 22,24. Diskan: Meulom oll da viken
..... Doue 'vid e vadelez.

2. Lavarit 'ta, pobl Israel: da viken e pado e vadelez!
4. Lavarit-c'hwil, servicherien Doue: da viken e pado e vadelez!
16. Dorn Doue e-neus grêt traou kaer; dorn Doue e-neus va laket em zao.
18. Doue e-neus va hastizet garo, heb va lezel e galloud ar maro.
22. Ar mên taolet kuit gand saverien an ti, setu grêt anezañ ar mên-korn.
24. En deiz-mañ grêt gand an Aotrou Doue, lammom ha tridom gand levenez.

Eil Lennadenn.- Dre ar feiz e teuom da veza
bugale da Zoue.

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN (5/1-6)

1. Kement hini a gred eo Jezuz ar Zalver, hennez a zo ganet euz a Zoue;
kement hini e-neus karantez evid an tad,
a gar ivez an hini a zo ganet anezañ.
2. Anad eo deom e karom bugale Doue, pa garom Doue
ha pa virom e hourhemennou.
3. Rag an dra-ze eo kared Doue: mired e hourhemennou.
Hag e hourhemennou n'int ket eur zamm ponner,
4. pegwir kement a zo ganet euz a Zoue a zo treh d'ar bed,
hag ar pezh e-neus grêt deom beza treh d'ar bed, or feiz eo.
5. Piou 'ta eo an hini 'zo treh d'ar bed,
ma n'eo ket an hini a gred eo Jezuz Mab da Zoue?
6. Eñ eo, Jezuz Krist, (ar Zalver a oa da zond),
an hini 'zo deut dre an dour hag ar gwad,
- n'eo ket én dour hebken, med én dour hag er gwad -;
hag ar Spered eo a zo test, rag ar wirionez memez eo ar Spered.

Notenn: Gwerzad 6, ar gerioù etre krochedoù a' zo
lakeet ouspenn, evid sklêr-raad.

=====

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia (bis). Deut eo Jezuz e kreiz e ziskibien:

"Ar peoh ra vo ganeoh, emezañ;

Eüruz neb a gred heb beza gwelet."

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (20/19-31)

19. Emaom da zeiz kenta ar zizun goude ma oa maro Jezuz, diouz an abardaëz.
An noriou 'zo bet prennnet war al leh m'emañ an diskibien,
dre aon rag ar Juzevien.
Dond a ra Jezuz, ha setu eñ en o zouez:
"Ar peoh ra vo ganeoh! emezañ."
20. Goude ar gomz-se, e tiskouez dezo e zaouarn hag e gostez.
Laouen braz eo an diskibien o weled an Aotrou.
21. Jezuz a lavar dezo a-nevez: "Ar peoh ra vo ganeoh!
Evel m'e-neus va Zad kaset ahanon,
me ho kas d'am zro."
22. Goude ar homzou-se, e c'houez warno, en eur lavared:
"Resevit ar Spered Santel:
23 d'ar re ho po pardonet dezo o fehejou, e vezint pardonet,
ha d'ar ho po o dalhet outo, e vzint dalhet."
24. Bez' e oa unan euz an Daouzeg, Tomaz, an hini anvet ar Gevell,
ha ne oa ket ganto pa oa deut Jezuz.
25. An diskibien all a lavar dezañ: "Gwelet on eus an Aotrou!"
Med eñ a zistag outo:
"Ma ne welan ket war e zaouarn ar merk euz an tachou,
ma ne lakan ket va biz e toullou an tachou,
ha va dorn en e gostez, me ne gredin ket."
26. Eistez goude, edo an diskibien adarre en ti, ha Tomaz ganto.
Prennet an noriou, setu Jezuz deut e-barz, en e za 'kreiz e ziskibien:
Lavared a ra dezo: "Ar peoh ra vo ganeoh!"
27. Goudeze, e lavar da Domaz: "Laka da viz amañ, ha gwel va daouarn;
tosta da zorn, ha lak anezañ em hostez:
na jom ket heb kredi, med deus da gaoud feiz."
28. Tomaz neuze dezañ: "Va Aotrou ha va Doue!"

29. Ha Jezuz: "Ablamour m'az peus va gwelet, out deut da gredi;
Eüruz ar re o deus bet feiz heb beza gwelet."
30. Stañk eo ar zinou burzuduz all e-neus bet grêt Jezuz
dirag e ziskibien, ha n'int ket skrivet el levr-mañ.
31. Ar re-mañ a zo bet skrivet
ablamour deoh da gredi eo Jezuz ar Zalver, Mab Doue,
ha, dre ho feiz, da gaoud buez en e ano.

+++++

OREZONOU evid an EIL SULVEZ PASK

KEMPEDENN -

Pedom Doue.

Aotrou Doue, trugarezuz a viskoaz ha da viken,
buezekaad a rit feiz ho pobl gand goueliou ar Pask;
lakit eta da greski ar hras on eus bet diganeoh,
ma komprenim gwelloh pebez badiziant he deus or gwalhet,
ha dre be Spered om bet ganet a-nevez,
ha gand gwad piou om bet prénet.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo ha leun
a hloar ganeoh ha gand ar Spered Glan,* a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU

Digemerit gand madelez, Aotrou Doue, provou ho pugale gristen;
deuet dezo buez nevez dre ar feiz hag ar vadiziant,
grit m'o devo ivez an eürusted peurbaduz. Dre J.K. or Zalver.

GOUDE KOMUNIA. Pedom oll a-unan... Ni ho ped, Doue oll-halloudeg:

goude m'on eus resevet er zakramant

ho Mab bet maro evidom hag adsavet da veo e mister e Bask,

grit deom e zigemer dalhmad e don or halonou.

Eñ (hag a zo) on Doue beo ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll ...

÷=÷=÷=÷=÷

TREDE SULVEZ PASK

Lennadenn Ia.- Doue e-neus roet e hloar da Jezuz;
ni on eus da gredi ennañ.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (3/13-15, 17-19)

- D'ar bobl dastumet dirazañ, Per a gomz evelhénn:
13. "Gwazed euz pobl Israel,
Doue Abraham, hini Izaag ha Jakob ive, Doue on tadou,
e-neus roet e hloar d'e zervicher Jezuz,
an hini ho peus-c'hwi laket etre daouarn Pilat ha dianzavet dirazañ,
goude m'e-noa hennez lavaret lezel gantañ e frankiz.
 14. C'hwi ho peus dianzavet an hini santel ha dibeh,
ha goulennet e vije roet deoh buez eur muntre.
 15. Mestr ar vuez ho peus lazet,
med Doue e-neus grêt dezañ sevel a-douez ar re varo:
test om-ni a gement-se.
 17. Ha bremañ, breudeur, gouzoud a ran ho peus grêt an taol heb anaoudegez,
c'hwi hag ar re a zo en ho penn.
 18. Med evelse e-neus Doue digaset da wir
kement e-noa lavaret dre vouez an oll brofeted
diwarbenn ar poaniou e-nefe ar Mesiaz da houzañv.
 19. Neuze 'ta, chenchit ho puez ha distroït da Zoue,
evid ma vo dilamet ho pehejou."

+++++

SALM 4 /2,4,7,9 - Diskan: Lakit da bara warnom ar sklerijenn euz ho tal;
Aotrou Doue, c'hwi 'garg or halon a levenez.

- Salm 4/ 2. Pa zavan va mouez davedoh, va zelaouit, c'hwi, va Doue;
va diboania 'rit pa vezan ankeniet:
ho pet truez ouzin ha selaouit va 'fedenn.
4. Deoh oll eo da houzoud e-neus Doue dibabet evitañ eur zervicher;
kleved a ra an Aotrou, pa hoñan d'e hervel.
7. Lakit da bara warnom ar sklerijenn euz ho tal, Aotrou Doue!
C'hwi eo a laka levenez leiz va halon.
9. Er pech ez an d'am gwele hag e teu ar housked din,
rag c'hwi hebken, Aotrou Doue, a ra din diskuiza dienkrez.

+++++

Eil Lennadenn. - "Anaoud Doue" a dalv kement ha beza
unanet gantañ. Lennom lizer sant Yann.

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN (2/1-5a)

1. Va bugale vian, skriva a ran deoh evid ober deoh mired diouz ar pehed.
Med, ma tigouez da unan bennag beza kouezet er pehed,
bez' on eus eun divennour dirag an Tad, Jezuz Krist, an hini dibeh;
2. Hag eñ eo ar zakrifis kinniget evid or pehejou,
hag ouspenn evid or re-ni: evid re an oll dud.
3. Gand an dra-mañ ez om sur eh anavezom anezañ: ma virom e hourhemennou.
4. An neb a vez o lavared: "Me 'anavez anezañ",
ha na vir ket e hourhemennou, hennez a lavar gaou
ha n'emañ ket ar wirionez o chom ennañ.
5. Med kement hini a vir e gomzou, ennañ e gwirionez
eo deut karantez Doue da daoler he haerra bleun.

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia... Salver Jezuz, digorit deom ar Skritur Zakr;
tommit or halonou pa vezit o komz ouzom.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT LUKAZ (24/35-48)

33. En abardaevez-se, deiz kenta ar zizun goude maro Jezuz,
an daou ziskibl a oa eet beteg Emmaüz a zo deut en-dro da Jeruzalem,
da gaoud an unneg ~~At~~stol hag ar re all a oa ganto.
35. Disklêria "reont dezo ar pezh a zo c'hoarvezet ganto en hent,
ha penaoz o deus anavezet Jezuz o terri ar bara.
36. Emaint c'hoaz gand o haoz, ha setu Jezuz en e zao er hreiz anezo.
37. Souezet braz ha kroget aon enno, e kave dezo gweled eur spezh.
38. Jezuz a lavar dezo:
"Perag oh ken strafuillet, ha perag e sav douetans en ho kalon?
39. Sellit ouz va daouarn hag ouz va zreid: me an hini eo.
Touchit ouzin ha sellit mad:
eur spezh n'e-neus ket kig hag eskern, evel ma welit din."
41. Amgredig e chomont c'hoaz en desped d'ar joa, ha bamet gand ar zouez;
setu e lavar Jezuz dezo: "Ha bez' ho peus eun dra bennag da zebri?"
42. Kinnig a reont dezañ eun tamm pesk bet poazet war ar hrill.
43. Eñ a gemer hag a zebr dirazo.
44. Goudeze e lavar dezo: "Digasit en ho sonj ar homzou-mañ,
am eus bet lavaret deoh p'edon c'hoaz en ho touez:
e ranke dond da wir kement a zo skrivet diwar va 'fenn
e Lezenn Voizez, er Brofeted hag er Psalmou."
45. Neuze e tigor dezo o spered da entent ar Skrituriou.
46. hag e lavar dezo: "Evelse eo merket er Skritur Zakr e tle ar Zalver
gouzañv ar maro ha sevel a varo da veo d'an trede deiz,
hag e tle ar binijenn evid pardon ar pehejou beza prezeget en e ano
d'an oll boblou, ha da genta e kêr Jeruzalem.
48. C'hwi eo a zo lakeet da dest euz a gement-se."

Trede Sulvez Pask - OREZONOU AN OVERENN

KEMPEDENN.-

Pedom Doue...

Aotrou Doue, goude beza digaset d'ho pobl nerz ha
yaouankiz nevez, grit ma chomo da viken el levenez;
pa 'z om eüruz dija gand an enor da veza bugale deoh,
dalhit stard ennom an esperans,

da hortoz an deiz ma savim a varo da veo.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,*
Doue beo (ha leun a hloar) ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.- R/. Amen.

WAR AR PROVOU

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ober digemer vad
d'ar provou a ginnig deoh an Iliz leun a levenez;
goude beza digaset dezi kement a joa,
grit ma vleunio enni al levenez da viken.
Dre Jezuz Krist, Or Zalver.- R/. Amen.

GOUDE KOMUNIA

Pedom Doue... (pe: Pedom oll a-unan)

Sellit gand madelez, Aotrou Doue,
ouz ar bobl ho peus nevezet dre ho sakramanchou;
ha pegwir ho peus roet deom eur horv galvet d'ar hloar,
grit deom chom unanet ganeoh

beteg an deiz ma savim a varo da veo.

Dre Jezuz Krist, Or Zalver.- R/. Amen.

+=+=+=+=+=+=+=

PEVARE SULVEZ PASK

Lennadenn Ia. - Silvidigez ebed nemed e Jezuz Krist

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (4/8-12)

- Goude ar pare roet d'eun dén kamm,
an abostol Pèr a zo bet galvet dirag kuzul-meur ar Juezvien.
8. Ar Spered Santel gantañ, evelhénn e komz outo:
9. "C'hwi, pennou braz ha re goz ar bobl, selaouit.
Prosez a reer deom hirio ablamour d'ar vad grêt d'eun dén kamm,
evid anaoud penaoz e-neus bet ar pare.
10. Deoh eta da houzoud, c'hwi oll ha pobl Israel a-bez,
eo dre ano Jezuz Krist a Nazared emañ an dén-se yah dirazoh:
c'hwi ho poa e staget ouz ar groaz,
Doue e-neus grêt dezañ sevel a douez ar re varo.
11. Eñ eo ar mên a zo bet bannet kuit ganeoh, saverien an ti,
hag a zo grêt anezañ ar mên-korn.
12. N'eus ket a zilvidigez dre hini all ebéd,
ha dindan bolz an neñv, n'eus roet e-touez an dud
ano all ebéd a hellfe or zavetei."

=====

SALM 117 / 1,8-9,21-23,26,28cd, 29.

Diskan: Ar mên bannet kuit gand saverien an ti,
e-neus Doue grêt anezañ ar mên-korn.

1. Lavarit mil bennoz da Zoue, rag eñ a zo mad:
da viken e pado e vadelez.

8. Gwell eo klask goudor gand an Aotrou Doue,
eged fizioud war an dud;
9. Gwell eo klask goudor gand an Aotrou Doue,
eged fizioud war an dud galloudeg.
21. Ho trugarekaad a ran da veza va zelaouet
ha da veza deut d'am zavetei.
22. Ar mên bannet kuit gand saverien an ti,
setu grêt anezañ ar mên-korn;
23. Gand Doue eo bet grêt kement-se: eur burzud eo dirag on daoulagad.
26. Ra vo benniget, en ano Doue, an hini 'zo o tond.
28. Ablamour ma 'z oh va Doue, me ho trugareka;
va Doue, me ho meul.
29. Lavarit mil bennoz da Zoue, rag eñ a zo mad;
da viken e pado e vadelez.

=====

Eil Lennadenn.- Doue, en e vadelez, a ra ahanom e vugale.

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN (3/1-2)

1. Bugale vian, gwelit 'ta pebez karantez e-neus bet an Tad evidom,
beteg ober ma vefem anvet bugale da Zoue,
ha bez' ez om e vugale e gwirionez.
An dra-mañ 'zo kaoz ma n'hell ket ar bed anaoud ahanom:
rag ma n'eo ket evid anaoud Doue.
2. Va re muia karet, bremañ dija om bugale da Zoue,
ha n'eo ket c'hoaz deut er sklerijenn ar pez a vezim.
An dra-mañ 'ouzom: pa vo deut e kreiz ar sklerijenn,
ni 'vo heñvel outañ, o veza ma welim anezañ evel m'emañ.

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia... Me, ar pastor mad, a anavez va deñved,
ha va deñved am anavez.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (10/11-18)

Kement-mañ a lavare Jezuz d'ar Juzevien:

11. Me eo ar pastor mad. Ar pastor mad a ro e vuez evid e zeñved.
12. An hini n'eo nemed mevel, ha n'eo ket eñ ar pastor,
pa n'eo ket an deñved e re dezañ,
a jom dizober da zelled ouz ar bleiz o tond,
a zilez an deñved hag a gemer an teh;
hag ar bleiz a daol e skilfou war an deñved hag o skign a beb tu.
13. Ar mevel a gemer an teh, pegwir n'eo nemed mevel
ha n'eo ket chalet gand an deñved.
14. Me eo ar pastor mad: anaoud a ran va re,
ha va re ivez am anavez,
15. evel ma anavez an Tad ahanon, ha me ivez a anavez an Tad;
ha va buez a roan evid va deñved.
16. Deñved all am eus c'hoaz, ha n'emañ ket er park-deñved-mañ;
ar re-ze ivez am eus da zigas davedon: kleved a raint va mouez,
ha ne vo nemed eur bagad deñved, hag eur pastor hebkén.
17. Ma kar an Tad ahanon, eo ablamour ma roan va buez,
evid he hemer en-dro.
18. Dén ebéd n'e-neus tennet anezi diganin,
med me eo a ro anezi ahanon va-unan;
galloud am eus d'he rei, ha galloud d'he hemer en-dro.
Kement-se am eus bet gourhemenn da ober a-berz va Zad."

+++++

OREZONOU AN OVERENN evid Pevare Sulvez Pask

KEMPEDENN - Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
renit ahanom daved ar joaiou na vo fin ebéd dezo,
ma vo poblad ho tud fidel bodet en ho kichen
dindan dorn ar Pastor n'eus nemetañ,
Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,
Doue beo (ha leun a hloar) ganeoh ha gand ar Spered Glan,
a oll viskoaz da virviken.- R/. Amen.

WAR AR PROVOU -

Plijet ganeoh, Aotrou Doue, ma talvezo an overenn-mañ
da vaga ennom al levenez a zeu deom diganeoh;
or zikourit da gemer perz gand frouez
e sakrifis ho Mab maro evid or prena hag adsavet da veo,
Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

GOUDE KOMUNIA - Pedom Doue...

Tad oll-halloudeg ha Pastor leun a vadelez,
plijet ganeoh diwall ho teñved gand karantez tener;
goude beza or zaveteet gand gwad ho Mab,
grit ma'z aim da veva eüruz e (prajou glaz) ho paradoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- R/. Amen.

÷=÷=÷=÷=÷=÷=÷=÷=÷=÷=

PEMPED SULVEZ PASK

Lennadenn Ia.- Sant Paol, nevez deut d'ar feiz, a zeu
..... da gaoud an Ebestel e kêr Jeruzalem.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (9/26-31)

26. Digouezet e kêr Jeruzalem,
Paol a glaske kaout darempred gand an diskibien.
Med oll o doa aon razañ:
ne oant ket evid kredi e oa eñ diskibl da Jezuz.
27. Neuze Barnabaz a gas anezañ gantañ da gaoud an Ebestel.
Displega a ra dezo penaoz, war an hent,
e-neus Paol gwelet an Aotrou hag e-neus komzet outañ,
penaoz c'hoaz, e kêr Damaz, e-neus prezeget hardiz en ano an Aotrou.
28. Adaleg neuze, edo gand an Ebestel o vond hag o tond dre gêr Jeruzalem,
o prezeg hardiz en ano an Aotrou.
29. Kaoz e-noa, ha tabut ive, gand ar Juzevien a yez gresianeg;
med ar re-mañ a glaske e zistruja.
30. O veza bet kelou a gement-se,
ar vreudeur a gas anezañ beteg kêr Sezare
hag a ra dezañ loha etrezeg Tars (e gêr hinidig).
31. D'ar mare-se, an Iliz, e broiou Jude, Galile ha Samari, a veve er pech,
dalhmad o vond war raog hag o veva e doujans Doue;
ha, gand sikour ar Spered Santel, e kreske an dud enni.

+++++

SALM 21 /27-28-30,31-32.

Diskan: E kreiz ar bobl e savan va mouez
d'ho meuli, Aotrou Doue.

27. Ar re baour o devo da zebri (roet e vo dezo) o gwalh;
bennoz d'an Aotrou Doue a lavaro an dud e glask a wir galon.
28. An douar a-bez e-no soñj hag a zistroio daved Doue;
ar broadou tud a beb gouenn a stouo d'e adori.
30. Ya, dirazañ e plego oll vistri an douar,
dirazañ e stouo ar re 'zo o koueza e ludu.
31. Ha me a vev evitañ, va lignez e zervicho;
32. D'ar bobl a zo da veza ganet e vo prezeget e vadelez.

=====

Eil Lennadenn.- Ali da gaoud gwir garantez, dre ober
ha n'eo ket dre gomz hebkén.

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN (3/18-24)

18. Va bugale vian, karantez a dleom kaoud,
n'eo ket dre gomz na diwar beg an teod,
med dre ober hag e gwirionez.
19. Setu amañ penaoz e vezim sur da veza euz tu ar wirionez
hag e lakim or houstians er peoh dirag Doue:
20. ma tigueuz e rafe or houstians rebechou deom,
Doue a zo brasoh eged or houstians hag a anavez peb tra.
21. Va re muia-karet, ma n'he deus or houstians netra da rebech deom,
neuze on eus dor zigor da vond beteg Doue,
22. hag e resevom digantañ kement tra a hellom goulenn,

ablamour ma virom e hourhemennou,
ha ma reom ar pezh a ra plijadur dezañ.

23. Hemañ eo e hourhemenn: kaoud feiz e Jezuz Krist, e Vab,
hag en em gared kenetrezhom evel m'e-neus gourhemennet deom.

24. An neb a zalc'h da vired e hourhemennou, a jom unanet gant Doue,
ha Doue a zo o chom ennañ;

hag evid gouzoud emañ o chom ennom, on eus ar Spered e-neus roet deom.

÷÷÷÷ Notenn. - Gwerzadou 19-21, eo laket "or houstiañs"
e-leh "or halon", evid beza intentet sklêrroh.

+++++

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia... Chomit ennon, koulz ha me ennoh;
Neb a jom ennon a zougo frouez e-leiz.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (15/1-8)

Araog tremen euz ar bed-mañ daved e Dad, Jezuz a lavare d'e ziskibien:

1. "Me eo ar winienn wirion, ar gwiniennour eo va Zad.
2. Kement skourr ennon na zougo ket a frouez a vo trohet kuit gantañ,
ha kement hini a zougo frouez a vo gantañ nêteet ha krennet,
evid ma tougo muioh.
3. C'hwi, adal bremañ, a zo nêd, ablamour d'ar homzou am eus lavaret deoh.
4. Chomit ennon, ha me ennoh.
Ne hell ket eur skourr dougen frouez dre e nerz e-unan;
evelse, na c'hwi kennebeud, ma ne jomit ket stag ouzin.
5. Me eo ar winienn, c'hwi ar skourrou.
An hini a jom ennon, ha me ennañ, hennez hebkén a zoug frouez e-leiz,
rag, distag diouzin, ne hellit ober netra.
6. An neb a jom ket stag ouzin a vo stlapet kuit, evel ma reer d'ar skourr,
hag a zeho, a vo dastumet, taolet en tan ha devet.
7. Me chomit ennon, ha ma chom va homzou ennoh.

goulennit ar pezh ho po c'hoant, hag e vo roet deoh.

8. Kement-mañ eo a zavo gloar d'am Zad: ma tougit frouez e-leiz,
ha ma vezit diskibien din.

+++++

OREZONOU AN OVERENN evid Pemped Sulvez Pask

KEMPEDENN - Pedom Doue...

C'hwi eo a bedom, on Doue hag or Mestr,

ho peus digaset deom ar Zalver ha grêt ahanom ho pugale;
taolit 'ta eur zell madelezuz war ar re ho peus evito karantez eun Tad:
ablamour d'o feiz en Aotrou Krist, grit dezo beva er frankiz gwirion
ha gounid ar vuez peurbaduz.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo (ha leun a hloar) ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU - Aotrou Doue, e sakrifiks an overenn e tigemerit or provou
hag e rit deom, en distro, kaoud perz en ho puez divin:
goulenñ a reom diganeoh, pa 'z om deut da anaoud ho kwirionez,
ar hras da zelher stard dezi a-dreuz or buez penn-da-benn.
Dre Jezuz Krist, or Zalver.- ~~R.~~ Amen

GOUDE KOMUNIA - Pedom Doue...

Aotrou Doue, chomit tost da bobl ho tud fidel,
ho peus digoret dezo feunteun ho sakramanchou:
grit dezo en em zistaga diouz plegou fall o natur,
(pe: diouz o hoz natur - "vetus homo")
evid kaoud dor zigor er vuez peurbaduz.

Dre Jezuz Krist, or Zalver. - R/ Amen.

一 二 三 四 五 六 七 八 九 十 十一 十二 十三 十四 十五 十六 十七 十八 十九 二十 二十一 二十二 二十三 二十四 二十五 二十六 二十七 二十八 二十九 三十 三十一 三十二 三十三 三十四 三十五 三十六 三十七 三十八 三十九 四十 四十一 四十二 四十三 四十四 四十五 四十六 四十七 四十八 四十九 五十 五十一 五十二 五十三 五十四 五十五 五十六 五十七 五十八 五十九 六十 六十一 六十二 六十三 六十四 六十五 六十六 六十七 六十八 六十九 七十 七十一 七十二 七十三 七十四 七十五 七十六 七十七 七十八 七十九 八十 八十一 八十二 八十三 八十四 八十五 八十六 八十七 八十八 八十九 九十 九十一 九十二 九十三 九十四 九十五 九十六 九十七 九十八 九十九 一百

C'HWEHVED SULVEZ PASK

Lennadenn Ia.- Penaoz eo bet digemeret en Iliz
..... ar re genta a-douez ar bayaned.

PENNAD EUZ LEVR OBEROU AN EBESTEL (10/25-26,34-35,44-48)

Eun ofiser euz arme Rom, anvet Korneli, e-noa galvet Per
da zond d'e sklerijenna.

25. Pa 'z eo erruet Per en e di, Korneli a ya en arbenn dezañ
hag en em daol e-harz e dreid.

26. Per a ra dezañ sevel, en eur lavared:

"Chom en da zav, me va-unan n'on nemed eun dén."

34. (Goude beza komzet gand Korneli), Per a brezeg d'an oll dud a oa en ti:

"E gwirionez, intent a ran bremañ ne laka Doue kemm ebéd etre an dud;

35. daoust euz peseurd gouenn e vez, kement hini a zouj anezañ
hag a vev hervez ar justis, a zo deut mad dezañ."

44. Per a oa c'hoaz gand e gomzou, pa ziskenn ar Spered Santel
war ar re oll a oa o selaou.

45. Ha sebezet e chom an diskibien a ouenn ar Juzevien deut eno da heul Per,
o weled e oa skuillet donezon ar Spered Santel war ar bayaned ive.

46. Rag o hleved a reent o tistaga komzou misteriu hag o veuli Doue.

47. Per neuze a gomz adarre:

"Daoust hag e hellfe unan bennag divenn rei dour ar vadiziant
d'an dud-mañ, p'o deus bet ar Spered Santel kenkoulz ha ni?"

48. Urz a ro eta d'o badezi en ano Jezuz Krist.

Hag ind neuze a bed anezañ da jom ganto eun nebeud deveziou.

+++++

SALM 97 / 1,2-3ab,3cd-4 - Diskan: Da oll boblou ar bed
e tiskouez Doue e zilvidigez.

1. Kanit da Zoue eur hantik nevez, pa 'neus grêt traou burzuduz;
dre nêrz e zorn hag e vreh santel, e-neus gounezet an treh.
2. Sklêrded e zilvidigez e-neus laket da bara,
e justis e-neus diskuliet dirag poblou ar bed;
- 3ab. N'e-neus ket dizonjet e vadelez hag e bromesaou e keñver Israel.
- 3cd-4. Ar pennou pella euz an douar o deus gwelet
ar zilvidigez deut a-berz on Doue.
Savit ho mouez en enor da Zoue dra an douar a-bez,
sonit ar muzikou ha kanit laouen.

=====

Eil Lennadenn - Sklerijenn dispar war ar pezh m'eo Doue:
..... karantez eo!

PENNAD EUZ LIZER KENTA AN ABOSTOL SANT YANN (4/7-10)

7. Va re muia karet, en em garom an eil egile,
pegwir eo ar garantez euz a Zoue,
ha kement hini e-neus karantez a zo ganet euz a Zoue
hag e-neus anaoudegez a Zoue.
8. An neb n'e-neus ket karantez n'anavez ket Doue,
rag Doue a zo karantez.
9. Evelhenn eo deut karantez Doue da bara en on touez:
e Vab unganet e-neus Doue kaset er bed, deom da gaoud buez drezañ.
10. Amañ eo emañ ar garantez: n'eo ket ni on eus karet Doue,
med eñ an hini e-neus karet ahanom ha kaset e Vab
da veza roet e sakrifikis evid pardon or pehejou.

SALUD D'AN AVIEL.- Alleluia... Neb e-neus karantez evidon, eme Jezuz,
a viro va homzou; va Zad a garo anezañ,
ha ni 'zeuio beteg ennañ.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT YANN (15/9-17)

An dra-mañ c'hoaz a lavare Jezuz d'e ziskibien:

9. "Evel ma 'neus va Zad karet ahanon, me ivez am eus ho karet.
Chomit em harantez.
10. Gand ma heuliot va gourhemennou, e chomot em harantez,
evel ma heulian-me gourhemennou va Zad hag e choman en e garantez.
11. Kement-se am eus lavaret deoh, evid ma vo va levenez ennoh,
ha ma vo peur-leun (pe: leun-barr) ho levenez.
12. Hemañ eo va gourhemenn din-me: en em garit an eil egile,
evel m'am eus-me karet ahanoh.
13. N'eus ket brasoh karantez eged rei ar vuez evid ar re a garer.
14. C'hwi 'zo va harantez ennoh,
ma rit ar pezh a hourhemennan deoh.
15. N'eo ket an ano a zervijer a roan deoh hiviziken,
rag ar zervijet ne oar ket petra ra e vestr;
bremañ e roan deoh an ano a vignon,
rag kement am eus klevet gand va Zad am eus roet da anaoud.
16. N'eo ket c'hwi ho peus choazet ahanon,
me eo am eus ho choazet-c'hwi, ha roet karg deoh
da vond euz va ferz ha da zougen frouez, frouez paduz.
Neuze, kement ho pezo goulennet digand va Zad em ano,
eñ hen roio deoh.
17. An dra-mañ eta a hourhemennan deoh: en em garit an eil egile.

OREZONOU AN OVERENN evid C'hwehved Sulvez Pask

GOUEL AR YAOU-BASK

Lennadenn Ia.- Penaoz eo bet pignet Jezuz d'an neñv.
.....

PENNAD DIGOR DA LEVR OBEROU AN EBESTEL (I/1-11)

1. Al levr kenta am eus grêt, Teofil kër,
diarbenn an oll draou e-noa grêt Jezuz,
e oberou hag e gelennadurez, adaleg an deiz kenta
2. beteg an deiz m'eo bet pignet d'an neñv,
goude beza roet e gemennaduriou, ar Spered Santel gantañ,
d'an Ebestel e-noa bet dibabet.
3. Dezo e-neus diskouezet sklêr e oa beo adarre war-lerh e Basion,
o rei liez merk a gement-se,
pegwir, epad daou-ugent devez, e teue dirag o daoulagad
hag e komze ganto diarbenn rouantelez Doue.
4. Edo o preja (pe: o tebri) ganto, ha setu e ro urz dezo
da jom heb kuitaad Jeruzalem, med chom eno da hortoz
m'o devo bet promesa an Tad,
"an hini, emezañ, ho peus klevet diganin;
5. rag Yann a roe ar vadiziant gand dour,
med c'hwi, er Spered Santel eo e vezot badezet abarz pell ahann."
6. Neuze, ar re 'zo en-dro dezañ a houlenn outañ:
"Aotrou, ha bremañ eo emach o vond da zevel en-dro
ar rouantelez evid pobl Israel?"
7. Hag eñ da respont: "N'eo ket deoh da anaoud ar mare pe an deiz
e-neus an Tad divizet euz e berz e-unan.
8. Med emach bremañ o vond da reseo eun nerz,
hini ar Spered Santel o tiskenn ennoh.

Ha c'hwi 'vo testou din
e kêr Jeruzalem, e bro Jude ha Samari a-béz,
ha beteg ar penn pella euz ar bed."

9. O veza lavaret kement-se, dirazo digor braz o daoulagad,
Jezuz a zo douget d'an neh,
hag eur goumoulenn a zeu d'e guzad ouz o daoulagad.

10. Chom a ra o zellou troet warzu an neñv,
e keit ha m'emañ Jezuz o vond kuit;
ha setu daou zén, dillad gwenn ganto, deut en o hichen,

11. hag a lavar dezo: "Gwazed Bro-Halile,
perag e chomit aze da zelled ouz an neñv?
Ar memez Jezuz, douget d'an neñv bremañ euz ho touez,
a zeuio en-dro en doare m'ho peus e welet o sevel d'an neñv."

+++++

SALM 46 / 2-3,6-7,8-9 - Diskan: Emañ Doue o pignad d'an neh
e kreiz eur mor a gan,
an Aotrou ouz son an drompill.

Diskan all (Kant.nº 70) Jezuz, en eil mister a hloar,
A zeu da guitaad an douar;
Sevel a ra d'ar baradoz,
Eno emañ ouz va gortoz.

2. Poblou ar bed, stlakit ho taouarn ha savit ho mouez;
en enor d'an Aotrou Doue youhit gand levenez.
3. Bez' eo an Aotrou an hini uhel meurbed,
roue braz war an douar a-bez.

6. Emañ Doue o sevel d'an neh e kreiz eur mor a gan,
an Aotrou ouz son an drompill.
7. Kanit gloar da Zoue, kanit 'ta!
kanit enor d'ar roue, kanit oll.
8. Roue an douar a-bez eo Doue, kanit salmou a zoare.
9. Da Zoue eo ar rouantelez war an oll vroïou,
emañ Doue azezet war e dront santel.

+++++

Eil Lennadenn.- Jezuz Krist e gloar an Tad, a-uz da beb tra.

PENNAD EUZ LIZER AN ABOSTOL SANT PAOL DA GRISTENIEN KER-EFEZ (1/17-23)

17. Plijet gand Doue Or Zalver Jezuz Krist, an Tad a zo dezañ peb gloar,
rei deoh eur spered a furnez hag a sklerijenn
evid kaoud gwir anaoudegez anezañ.
18. Plijet gantañ sklerijenna daoulagad ho kalon,
deoh da houzoud da bebez esperans e-neus ho kalvet,
peseurd teñzor a hloar a roio deoh da heritaj etouez ar zent,
19. ha peger braz eo e halloud evidom-ni, ar re o deus ar feiz.
Bez' eo ar galloud-se kreñv ha nerzuz,
20. hag e ziskouezet e-neus e-keñver an Aotrou Krist,
pa 'neus grêt dezañ sevel a douez ar re varo
ha mond d'azeza en tu deou dezañ en neñvou,
21. kalz uhellou eged kement nerz ha galloud a zo a-uz deom,
daoust pe ano o deus, koulz er bed-mañ hag en hini da zond.
22. Peb tra e-neus lakeet dindan e dreid,
ha grêt e-neus anezañ ar penn euz ar horv ma 'z eo an Iliz,
23. rag gand an Iliz eo teu an Aotrou Krist da gaoud e vent,
eñ ha na zeu d'e vent nemed e oll izili gantañ.

+++++

SALUD D'AN AVIEL - Alleluia... It dre ar bed,
grit euz an oll boblou diskibien din;
setu emañ ganeoh bemdez beteg fin ar bed.

PENNAD EUZ AVIEL JEZUZ KRIST HERVEZ SANT MARK (16/15-20)

Jezuz, goude ma oa adsavet da veo, e{neus lavaret d'an Ebestél:

15. "It dre ar bed a-bez, embannit kelou mad an Aviel d'an oll dud.
16. An neb e-no feiz hag a resevo ar vadiziant, a vo salvet;
an neb a zinaho kredi a vo kondaonet.
17. Setu ar zinou burzuduz a vo da heul ar re o devo kredet:
dre va ano e kasint kuit an droug-sperejou,
yezou nevez a gomzint, kregi a raint en naered,
18. ha goude m'o defe evet eur poezon marvel bennag,
n'o devo diêz ebed;
astenn a raint o daouarn war ar re glañv,
hag ar re-mañ a wellaio dezo."
19. Neuze, an Aotrou Jezuz, echu gantañ e gomz, a zo bet douget d'an neñv
hag a zo eet d'azeza en tu deou da Zoue.
20. Hag int-i a zo eet da brezeg e peb leh,
an Aotrou Krist o labourad a-unan ganto
hag o harpa nerz o homzou dre ar burzudou a veze d'o heul.

+=+=+=+=+=+=+=+=+=+=+=+=+=+=+=+=

OREZONOU AN OVERENN evid Gouel ar Yaou-Bask

KEMPEDENN - Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg, kargit or halonou, ni ho ped,
a levenez hag a anaoudegez vad,
pegwir, gand Or Zalver pignet d'an neñv,
an treh e-neus gounezet a zo dija on hini ivez:
o veza ma'z om izili euz e gorr ha ma' z eo eet en or raog
e kreiz ho kloar, grit deom, dre an esperans,
beva eno a spered hag a galon.

Dre Or Zalver Jezuz Krist, ho Mab hag on Aotrou,* Doue beo (ha leun
a hloar) ganeoh ha gand ar Spered Glan, a oll viskoaz da virviken.

WAR AR PROVOU - Aotrou Doue, gand eur galon izel e teuom da ginnig deoh
ar zakrifis-mañ en deiz ma reom gouel ho Mab pignet d'an neñv;
goude beza digemeret or provou, roit deom en distro ar grasou
or zikouro da vond, ni ivez, beteg ar baradoz.
Dre Jezuz Krist, or Zalver. -

GOUDE KOMUNIA - Pedom Doue...

Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
madou an neñv a roit deom da dañva p'emaom c'hoaz war an douar;
plijet ganeoh maga ennom ar volonteiz da veva unanet gand Or Zalver,
eñ hag e-neus laket on natur-dén da droni en ho kichen:
Doue beo ha leun a hloar a oll viskoaz da virviken. -

+++++++ Prefas ar Yaou-Bask er bajenn war-lerh.

PREFAS EVID GOUEL AR YAOU-BASK

An Aotrou Doue ganeoh. - R/. Ha gand ho spered.
Ho kalon d'an uhel.- X/. Troet eo warzu Doue.
Lavarom bennoz da Zoue, on Aotrou.- R/. Just ha santel eo.

E gwirionez, just ha santel eo
ho trugarekaad e peb leh hag e peb amzer,
c'hwil, Tad santel, Aotrou Doue oll-halloudeg ha peurbadel,
dre Jezuz Krist, or Zalver.

Rag, goude beza savet a-douez ar re varo,
e-neus Jezuz en em ziskouezet beo d'e oll ziskibien
ha dirag o daoulagad ez eo pignet d'an neñvou,
evid on lakaad da gaoud perz en e natur a Zoue.

- * Setu perag, war an douar euz an eil penn d'egile,
emañ pobl an dud vadezet o tridal gand ar vrasa levez, e
epad m'emañ, e-barz an neñvou, an oll sperejou eüruz
o kana meuleudi d'ho kloar, heb ehan ha da viken:

Pe, gand ar hlozadur berr:

- * Setu perag, a-unan gand an Elez hag an oll Zent,
e savom or mouez da veuli ho kloar, en eur lavared a greiz kalon:

"Communicantes" er Bedenn-veur genta:

Unanet gand an Iliz a-béz, e lidom an deiz santel meurbed
m'e-neus ho Mab unganet douget on natur-dén gwan ha dister
a-zeou deoh en ho kloar; hag e fell deom enori... etc.
